

KIS-606 – Va istor zo bihan, met va istor eo

(RLN da GE – 27 11 98)

War LAVAR 11, en notenn KIS-540, pp. 212-213, e venegez un arroud gant Hans JONAS ma kaver ar frazenn-mañ : hennadoù [...] n'o devez ar bezout nemet dre zont dezhañ dalc'hmat, pep pred o tegas un argraf nevez en o istor ; a zo enta o hevelepted dre an amzer [o *zreiinded*], n'eo ket hevelepted anniñv un dindanad trebadek [*treanded, treaniñ*], met hevelepted unangrouet ar c'hefleuniañ kendalc'hek [*treüiniñ*]. Mar lakaer e c'hoarvez seurt hennadoù eus emsavioù pe eus bloc'henoù, ez adkaver er frazenn-se un diverrañ eus klozadurioù dezrannoù a zo bet graet c'hoazh war *Emsav*. Goulou a zegas da skouer ar frazenn-se war an diforc'h etre Gallaoued evel CHIRAC pe JOSPIN, a zo brogar met ivez damantus da dalbenn an Istor, ha broadelourion an dehou pellañ.

Anat eo ez eo an hevelepted c'hall evit tud *Talbenn ar Vroad* “ hevelepted anniñv un dindanad trebadek”, pezh nad eo ket nevez hag a oa endeo savboent BARRES pe MAURRAS. Alese emzalc'h nac'hek, a zo a-benn ar fin un emzalc'h a dec'hadenn, al lepenourion dirak an argrafoù nevez evel an enbroañ pe an unvoneiz. Ne oa ket gwechall a vihanniveroù stank a Vagrebiz hag a Vorianed e Frañs, ha bremañ ez eus anezho. Marteze e vije bet gwell reoliñ an enbroañ en un doare perveshoc'h er bloavezhioù 60 ha 70, ha na vegañ an emdouell e oa labour evit an holl e Bro C'hall, met n'eus ket tu da vont war giz en Istor. Ne vez ket degemeradus seurt bihanniveroù evit *Talbenn ar Vroad* dre ma n'int ket lodennek en “dindanad trebadek” (bet despizet gwechall gant BARRES a-geñver gant an Anaon). Al lepenourion o deus dibabet da ziskoulm evit tud ar bihanniveroù-se an distro d'ar vro orin. Pezh a zo un diskoulm a aezamant hag a leziregezh, na c'hell kas nemet da heuliadoù gwallzisos'hus, evel a ouzer a werso. Pa venner talañ da vat ouzh an argraf, e stader n'eus nemet un diskoulm talvoudek : tennañ ar bihanniveroù arallgevandir diouzh an arlezadegzh m'emaint. Nemet e vo evel just un embreg hirbad, liesdek-vloaziadek, tra ma vije tu da emzijañ diouzh an enbroidi e berr amzer (n'eus nemet gwelout penaos ez emzibab Serbiz evit lakaat ar Gosovoiz albaneger da skampañ kuit). Hent an treüiniñ, hent an Istor eo avat hevelep labour hirbad, tra ma vefe kentoc'h savboent *Talbenn ar Vroad* hini tud hoalet gant al ledistor klet.

Heñvel dra evit an unvoneiz. Setu ma teuer da freuzañ al lur gall, a zo koulskoude un elfenn — hag unan bouezus tre — eus an “dindanad trebadek” : dibenn riegezh Frañs eo evit an dehou pellañ. Hemañ a ziwel ne c'hoarvez ket an argraf gwerc'hek eus gouzout penaos e tifenno Bro C'hall he riegezh a-enep riezoù all Europa, met eus gouzout penaos e tiwallo ar broioù europat kevret o riegezh a-dal d'ar Stadoù Unanet ha da Japan (hag ivez da Rusia pa vo deuet houmañ er-maez eus an enkadenn m'emañ). Pezh a zo bet komprenet mat tre gant CHIRAC, nad eo ket bet neoazh un europour gredus e-pad pell amzer.

Ar gevredigezh henvoazel zo aet da get peogwir n'eo ket bet gouest ar re a samme atebegzhioù enni da dalañ ouzh ar greantelaat. Ha zoken ez emsellent evel diangorzh e-keñver an argraf-se. Met ha n'eo ket bet ivez emzalc'h diazezerion an Trede Republik ? Etre ar bolitikourion republikan er galloud hag an nagennerion vroadelour pe unpenelour ez eus bet un emglev devoudel evit derc'hel an “dindanad trebadek” a oa bet muturniet gant koll Elzas-Loren. Seurt muturniadur a veze kantaezet evel doanius kenan, dic'houzañvadus koulz lavarout : un dlead nevet e oa enta prientiñ an Digoll. Hogen prientidigezh an Digoll ne viras ket ouzh ar vloc'henn c'hall a risklañ en ul ledistor klet. E kealiad *Talbenn ar Vroad* e vefe tu moarvat da gavout un hiraezh da seurt kletadurezh.

Abae Unpeniezh Gouere e veze sellet ivez Aljeria evel lodennek en “dindanad trebadek”. Pezh a zispleg — e-touez arbennoù all — e padas brezel Aljeria eizh vloaz, tra m'o doa bet an Dunizianed hag ar Varokiz o dizalc'hiezh goude reuzioù kalz disteroc'h ha kalz berroc'h o fadelezh.

(GE da RLN – 28 11 98)

Prederiañ a rez peurliesañ war an istoregezh a-zivout Frañs, o lakaat fraezh a-wel savlec'h ar Frañsizion hag o leviaded e-keñver talbenn an istor. An aters a sav ganin eo hemañ : quid eus ar pezh a reomp ni ? Penaos e lavarfes emañ war dalbenn an istor eskoridigezh ur yezh nad eo evit an ampoent yezh bro ebet ? Gant gerioù all : penaos e taveez hevelep eskoridigezh d'ar stern empleg ma taveez dezhañ an devoudoù gall, belgiat pe all a zezvarnez ? Anatañ kenderc'h an hil istor ma perzhiomp eo ar brezhoneg, ni oar avat n'eo ar brezhoneg nemet parzh hewel ar skorngrac'h : ha ne gav ket dit eo poent treiñ da selloù etrezek ar parzhioù diwel ? Ha ne ve ket poent distremen an emzalc'h nac'hek a zo, pa vez anv eus an devoudoù brezhon, haeriñ o anistoregezh ? A-du ganit evit barn da anistorek un darn vat eus ar pezh a welomp dindan vanniell Breizh en-dro dimp. Andilested istorel ar *Mouvement breton* n'eo ket

un digarez evit argarzhñ kement a amc'houl bezañ breizhat. A-du e ves moarvat evit digej pezh a zo istorek en devoudoù brezhon evel ma rez gant an devoudoù gall pe all ? Dister ent kementadel eo an istoregezh vrezhon, nemet ez eus anezhi hag, evel ma lavar AAB, va istor zo bihan, met va istor eo. Gant ar c'hwezek bloavezh a drevell embregel-damkanel tremenet en ESB hon eus pellaet da vat an tentadur a oa hini ar geto : labourat evel pa vije al labour un ober eriunellek troc'het diouzh gwerc'helezh an istor. Evit parraat ouzh an tentadur-se ne ouie tud ar geto nemet sevel skoed o ambren vroadelour (na ziwelomp ket evelkent e kase ar geto da vat ul lankad eus ar *c'hatarsiz* boulc'het gant an Emsav : treiñ mezh ar Breizhad e kasoni enepgall). Leuskel ar vroadelouriezh war hon lerc'h avat n'hon endalc'h ket da c'hourzhodiñ an devoud broadel. Da zebrannoù sklaerius war an devoud broadel gall a dalvez dimp e kement ma'z omp perzhiat en istor gall moarvat, met dreist-holl e kement ma kasomp un istor all, an hini emaoimp ni war e dalbenn — “istor broadel ?” a c'houlennor ; an adanv ne vern ket, rak an istor eo a roy e ster dezhañ ha n'eo ket ar gin.

Ur skouer a zebrann daoudroc'h eo an hini a rez eus al luskadoù politikel gall diwar-bouez prederouriezh Hans JONAS. Daoudroc'h a lavaran, rak an emzalc'hioù ledistorek a damallez d'ar *Front national* hon eus desket o anaout dre gaout d'ober ouzh ledistoregezh al luskadoù breizhek. Ha keal talbenn an istor a rez anv anezhañ a-zivout ar gevredigezh c'hall, daoust ha n'eo ket eskoret dre hon embreger-damkanañ eginoù ur gevredigezh vrezhon ? Mat eo bezañ brokus gant ar re all, met dav ivez soñjal en hon aferioù hon unan. Lusk ha keflusk zo hiziv e pep lec'h e Breizh. Talvout a ra ar boan klask kompren ar pezh a c'hoarvez, er-maez eus stlenn durc'haet *Ouest France* hag eus moederezh arreadek al luskadoù politikel ha kulturel brezhon. A bouez eo dezvarn an unpreder o ren er gevredigezh c'hall, moarvat dre ma'z eo hi ar gevredigezh ma vevomp ha dre ma sil he ideologiezh en hon speredoù hag e speredoù hon bugale, met dreist-holl dre ma n'eo ket re abred evit vaksinañ ouzh kleñvedoù ar c'hevredigezhioù all an egin a gevredigezh a zo er yezh a grouomp.

(RLN da GE – 03 12 98)

Din e lavarez : “Prederiañ a rez peurliesañ war an istoregezh a-zivout Frañs o lakaat fraezh a-wel savlec'h ar Frañsizion hag o leviaded e-keñver talbenn an istor.” Gwir eo ; emaoimp o studiañ ar perveshañ gwellañ arbennoù c'hwitadenn an Trede Republik, o klask kompren perak he deus houmañ disoc'het da renad Vichy. Da 'm meno n'eo ket bet ar renad-se un heuliad d'ar gouzalc'herezh alaman (aze ez an a-enep d'an diogeladennoù boas). En degouezh en deus seurt gouzalc'herezh talvezet da

ziskuliañ fraezh nammoù ur gevredigezh aet da ledistorek abaoe pell. Hevelep studi zo a-walc'h da lonkañ va amzer. Met ha dizeur eo gwelout ez eo gwezhiadek tre e dezrann ar gevredigezh c'hall meizadoù eskoret e-ser al labour embreger-damkanañ renet gant E.S.B. ? Ha n'eo ket kentoc'h kalonekaus ?

Se ne dalvez ket e choman diseblant ouzh ar pezh a c'hoarvez e Breizh. Plijet tre on bet o c'houzout e oa e douaradur Herve KERRAIN ur vandennad tud yaouank ganto ur brezhoneg mat, deuet er-maez eus levezon ar rannyezhoù. E diabarzh *Diwan* e kemmo tost sur ar c'heñverioù nerzh tamm ha tamm : diemsavus ouzh diemsavus e teuint da vezañ evit dalc'hiaded an etrevroadeg, h.a.

Met ha ne gej ket hon istor dimp ni gant hini an Trede Republik , Diazezerion ar P.N.B. ha krouerion *Gwalarn*, daoust ha ne oa ket anezho tud emouez ouzh goulerc'h ha diyac'h kevredigezh c'hall o mare ? Ha se moarvat peogwir e oant chomet digor d'al lavar bed kempred. Evel just, gant an diabell hon eus, e c'hellomp ni gwelout spis o fazi : ar vloc'henn ma vevent ne oa ket fall peogwir e oa gall, met peogwir e oa ledistorek. Hogen bonveziad d'ur c'henderc'hañ istor eo bet ar fazi-se.

Evit sevel pelloc'h eget an Trede Republik, ha n'eus ket bet e-touez diazezerion an Emsav kentañ brientinon o doa divroet e grez an Dispac'h hag an Impalaeriezh ? Ar re o doa divroet da Vreizh Veur (ar re niverusañ e-touez an harluidi vreizhat) o deus gallet mat tre eno ober anaoudegezh gant ar sevenadur saoz, met ivez gant yezh ha lennegezh ar bihanniveroù keltieger. Pezh a rofe d'an divroañ brientin ha kloer un ampar a vez diwelet peurliesañ : kentoc'h nac'hek eo kemmoed an divroidi en istor gall. O skrivañ se e samman ar riskl da vezañ kehuzet a villierouriezh, hep kaout evit kelo an disterañ harp digant an Ao. Beskont, pell m'emañ diouzhin en e gastell eus Le-Puy-du-Fou.

(RLN da GE – 08 12 98)

“E Breizh n'eus ket bet savet ur vloc'henn nevez evel e Slovakia pe e Kroatia. Ha n'eo ket sur e oa hetadus.” Se 'm eus skrivet dre ma hañval din e c'hell Breizhiz kemer perzh en istor e ser ar vloc'henn c'hall kenkoulz hag ar Frañsizion all.

(GE da RLN – 11 12 98)

Hag ar Frañsizion all, da 'z meno, a gemero perzh en hil istor ma labouromp ?
A du 'rall, hag ar mare mat eo klask imboudañ hon hil
istor nevezc'hanet ouzh un hil kabac'h, dindan askell ur riez a zo o koll unan hag unan
tammoù eus ar riegezh, dec'h al luoz, hiziv ar moneiz, warc'hoazh petra ? Ha ne gav
ket dit e chom forzh penaos akademek an dibab evit c'hoazh ? Emaomp e prantad
derou an adeiladiñ, pell c'hoazh diouzh par ur gedvuhez evodet eus an hil istor ha
yoc'hek a-walc'h da gaout pouez politikel. Den ne oar war betra e tifourko hon
embregadenn hag an angouzout-se ned eo ur skoilh outi e nep doare. Diouer a fiziañs
enni eo deverkañ dezhi ur pal politikel en a-raok, ha pa ve ar sevel ur Stad vrezhon pe
ar bezañ ensammet gant ar Stad c'hall. Emc'houlenn a ran koulskoude ha kement a
galon hor bije mar soñjemp ez eo hon labour liammet da viken ouzh tonkad ar
vloc'henn c'hall. Kompren a ran lorc'h ar Varbared degemeret da geodedourion en
Impalaerded roman. Met n'omp ket Barbared ken hag an Impalaerded c'hall, na dizhas
ket en he mog bezañ estreget un heklek marmouzus eus an Impalaerded roman, zo
pelloc'h un tasmant. Ha ne 'c'h eus ket aon da vougañ ?